

Ar Bobl : Deoc'h 'h-c'hwi, Aotroù Doue, a viskoazh da viken,
eo pep Rouantelezh, gloar ha galloudegezh. Amen.

KANNADUR AR BARA

Oan Doue a zilam pec'hed ar bed, - **ho pet truez ouzhimp.**
Oan Doue a zilam pec'hed ar bed, - **ho pet truez ouzhimp.**
Oan Doue a zilam pec'hed ar bed, - **roit dimp ar peoc'h.**

Ar Beleg : Evurus ar re a zo galvet da bred santel hon Salver
Setu Oan Doue, an hini a zilam pec'hed ar bed.

Ar Bobl : Ma Doue, n'on ket din e teufec'h betek ennon
met lavarit ur ger hepken hag e vin pareet.

KLOZADUR

An Aotroù Doue ganeoc'h.

- **Ha gant ho spered.**

Doue hollc'halloudek d'ho pennigo
an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel.

- **Amen.**


It e peoc'h hon Salver.

- **Bennozh da Zoue.**

-
- Meulet, karet ha trugarekaet ra vo Jezuz en Nenv hag er Sakramant adorabl eus an Aoter ! - Da jamez !
 - Doue da bardono d'an Anaon! - Amen!

IMPRIMATUR, Sant-Brieg, 25-4-70
H. GLOAGEN,
Vikel-Vras

KANTIKOU BREZHONEK



Prières, cantiques et ordinaire de la messe.

Copie d'un livret transmis par l'abbé Louis HENRY en mars 2021

IMPRIMATUR, Sant-Brieg, 25-4-70
H. GLOAGEN,
Vikel-Vras

FE DENNOÙ	3
ANTIKOU BREZHONEK.....	4
FE DENN : KENT HO KUITAAT	4
AN ANGELUS	5
<i>En azvent</i>	5
<i>Amzer bask</i>	5
<i>E-pad ar bloaz</i>	6
EURUS AN HINI	6
MEULOMP HOLL DA JAMEZ.....	7
KARET DOUE DA GENTAÑ	7
ENOR HA GLOAR	8
SPERED SANTEL.....	8
DA FEIZ HON TADOÙ KOZH.....	9
SALUD ILIZ MA FAROUZ	9
JEZUZ A LAR DIMP PEDIÑ	10
KANTIK BREURIEZH AR FEIZ.....	10
TREMEN 'RA PER TRA	10
EN AN' DOUE HON SIKOURET.....	11
JEZUZ PEGEN BRAS Ê !	11
BARADOZ DUDIUS	12
OFROMP D'AN NEÑV	12
ME HO SALUD, KORF MA SALVER.....	13
AILED EUS AR BARADOZ	13
ADOROMP HOLL.....	13
JEZUZ SALVER ADORABL	14
SAKRAMANT AR C'HAERAÑ.....	14
KALON SAKR	15
AR SALVER EC'H OMP O C'HORTOZ.....	15
DEUT, SALVER AR BED	15
MABIG JEZUZ	16
PA OA GANET JEZUZ	16
DISKENNET EUS AN NEÑVOÙ	17
JEZUZ, DRE HO SOUFRANSOÙ	17
KENTELIOÙ AR GROAZ	18
DOUE, GWIR BREID.....	18
ALLELUIA SUL FASK.....	19
MI HO SALUD, STEREDENN VOR.....	19
GLOAR DA VARI	20
MI HO SALUD, ROUANEZ AN AELEZ.....	20

Ra blijo gantañ rein dimp santelezh ma c'hellimp ni ivez dont da vezañ ur brofadenn beurbadus, ha kaout lod en evurusted ar Baradoz gant ar Werc'hez glorius Vari, mamm da Zoue, an Ebestel venniget hag ar Verzherion enorus, Santez Anna ha sant Erwan, (Sant an deiz pe patron ar barroz) hag an holl sent ha santezed a zalc'h da bediñ dirazoc'h evidomp.

Grit ivez, ni ho ped, Aotrou Doue, ma talvezo ar Sakrifis-mañ, Sakrifis ho pardon hag an Emglev nevez, da zegas d'ar bed a-bezh peoc'h ha silvidigezh.

Kreñvait feiz ha karantez hoc'h Iliz a-hed he beaj war an douar; kennerzhit ho servijer hon Pab ..., hon Eskob ... , hag an holl eskibion ha beleion.

Sikourit ar bobl a-bezh hoc'h eus dibabet evidoc'h

- Ho tud fidel bodet dirazoc'h evit ho servijiñ : selaouit o fedennoù ha bezit ganta 'vit o diwall.
- Ho pugale dispartiet a bep tu : galvit anezho davedoc'h, o Tad madelezhus, ma vezint ivez eus ho Pobl.
- Hon breudeur tremenet, ha kement den just en deus kuitaet ar bed-mañ plijet ganeoc'h reiñ dezho un degemer mat en ho Rouantelezh.

Eno ivez hon eus an esperans da vevañ ganto unanet holl da virviken ha da gaout hon gwalc'h eus splannder ho kloar, dre hon Salver Jezuz Krist rak drezañ e skuilhit war ar bed an holl vadoù gant largetez.

Dre ho Mab, gantañ hag ennañ
 Deoc'h-c'hwi, Doue an Tad hollc'halloudek
 a-unan gant ar Spered Santel,
 pep gloar ha pep enor
 a holl viskoazh da virviken. – AMEN

VID AR GOMUNION

Ar Bater :

Hon Tad hag a zo en neñv, hoc'h ano bezet santelaet, ho rouantelezh deuet dimp; ho polontez bezet great war an douar evel en neñv.

Roit dimp hirie hon bara pemdeziek; pardonit dimp hon pec'hedoù evel ma pardonomp d'ar re o deus manket ouzhimp. Ha n'hon lezit ket da gouezhañ en temptadur, met hon diwallit diouzh an droug.

Plijet ganeoc'h hon Salver Jezuz Krist.

Bedenn-veur III

Santel oc'h-c'hwi, Aotrou Doue,
ha dleet eo da gement hoc'h eus krouet kanañ deoc'h meuleudi, rak dre ho Mab, hon Salver Jezuz Krist, ha dre nerzh ar Spered Glan, e roit da bep tra buhez ha santelezh, hag e talc'hit da vodañ a bep tu ur bobl a vezo hoc'h hini, ur bobl a ginnigo d'hoc'h ano santel, dre ar bed-a-bezh, ur brofadenn dinamm.

A galon izel e c'houlennomp eta diganeoc'h, Aotrou Doue, ma vo sakret ha santelaet gant ho Spered Glan ar profoù-rmañ hon eus degaset deoc'h, ma teuint da vezañ korf ha gwad ho Mab, hon Salver Jezuz Krist, en hag en deus gourc'hemennet dimp lidañ ar Sakrifis-mañ.

En noz maz eo gwerzhet, Jezuz a gemer bara, hag en ur rentañ deoc'h gloar ha trugarez, e vennig hag e rann anezhañ etre e ziskibion, en ur lavarout :

Kemerit holl ha debrit, rak kement-mañ eo ma c'horf laket d'ar maro evidoc'h.

Evel-se c'hoazh goude koan e kemer ar C'halir, hag en ur rentañ deoc'h gloar ha trugarez, e vennig anezhañ hag e ro d'e ziskibion en ur lavarout :

Kemerit holl hag evit, rak hemañ eo kalir ma gwad, gwad an Emglev nevez ha peurbadus, skuilhet evidoc'h hag evit an dud da zilemel ar pec'hedou. Grit kement-mañ evit lidañ ar soñj ac'hanon.

Setu amañ Mister ar Feiz!

Ar bobl :

Ho maro prizius a lidomp, o Salver !

Gant joa ec'h embannomp hoc'h adsav leun a splannder,

'N ur c'hortoz ho tistro e dibenn an amzer.

O terc'hel soñj eta, Aotrou Doue, eus ho Mab en deus gouzañvet e Basion evit hon silvidigezh, a zo adsavet burzhudus a varo da vev ha gant gloar pignet d'an Neñvoù, en ur c'hortoz ivez ma teuy en-dro e fin ar bed, e kinnigomp deoc'h evit ho trugarekaat ar Sakrifis-mañ bev ha santel.

Taolit, ni ho ped, ur sell madelezhus war brofadenn hoc'h Iliz, evit anazevout enni Sakrifis ho Mab en deus roet dimp ho pardon en-dro ; ha pa vimp bet maget gant Korf ha Gwad hon Salver, roit dimp ar c'hras da vezañ leuniet gant ar Spered Santel evit na raimp mui nemet ur c'horf hag ur spered hepken e Jezuz Krist, hon Aotrou.

ENOR D'HOC'H ANO BENNIGET	21
KA/ON DOUS A VARI	21
KANOMP A VOUEZH UHEL	22
KANOMP HOLL MEULEUDI DA JOZEFI	22
Ⓞ SANT JOZEF, NI HO SUPLI	22
SANT JOZEF, PRIED MARI	23
MAMM AN ITRON VARIA	23
KOUANEZ KARET AN ARVOR	23
SAINTE ANNE, O BONNE MÈRE	24
KANTIK SANT ERWAN	24
DEENN DA WERC'HEZ VU/AD (BULAD-PESTLEN)	25
ITRON VARIA WIR-SIKOUR (GWENGAMP)	25
ITRON VARIA SANT-KARE (LANVEI)	26
KANTIK AR BUGEL D'AR WERC'HEZ (PERROZ-GIREG)	26
ITRON VARIA AN ENEZ (GOUDELIN)	26
NOTRE-DAME DES FONTAINES (PONTRIEUX)	27
Ⓞ WERZ ITRON VARIA ROSTREN (ROSTREN)	27
Ⓞ WERZ ITRON VARIA AR GIODET (LARUE !)	28
REINE DE L'ARVOR	28

ORDINAIRE DE LA MESSE (ORDINAL AN OFERENN)

VIDOU-DIGERIÑ	29
<i>Ar Salud d'an Ilizad</i>	29
<i>Lid ar Binijenn</i>	29
<i>Ar Beleg</i>	29
<i>Kirie</i>	29
<i>Gloria</i>	30
VID AR GOMZ SANTEL	30
<i>Kemennadur an A viel</i>	30
<i>Goude an A viel</i>	30
<i>Kredo (an Ebestel)</i>	31
VID AN EUKARISTIEZH	31
<i>Kinnig ar Bara hag ar Gwin</i>	31
DEENN-VEUR	32
SANKTUS	32
<i>Bedenn-veur III</i>	33
VID AR GOMUNION	34
<i>Kannadur ar Bara</i>	35
KLOZADUR	35

Livret réalisé par le relais de Plouézec - Edition de août 2021

Bedennoù

† En ano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel. Amen.

Hon Tad pehini zo en neñv, hoc'h ano bezet santifiet; ho rouantelezh deuet dimp; ho polontez bezet graet, war an douar evel en Neñv.

Roet dimp hirie hon bara pemdeziek; pardonet dimp hon ofañsoù evel ma pardonomp d'ar re o deus hon ofañset ; ha na bermetet ket e kouez-femp en dentasion, met hon dilivret a bep droug. Amen.

Me ho salud Mari, leun a c'hras : an Aotroù Doue zo ganeoc'h. Benniget oc'h dreist an holl gwiragez; ha benniget eo ar frouezh dimeus ho korf, Jezuz.

Santez Mari, Mamm da Zoue, pedet evidomp, pec'herien, bremañ hag en eur eus hon maro. Amen.

Ma Doue, me zo glac'haret d'ho pezañ kement ofañset, abalamour d'ho madelezh, d'ho majestez, d'ho santelezh. Me a bromet en em viret gant gras Doue, ouzh pep pec'hed, spesialamant ouzh ar re ma 'c'h on ar muiañ kustum dê.

Bedenn-veur

An Aotroù Doue ganeoc'h. - **Ha gant ho spered.**
Savomp hon c'halonoù. - **Troet int war-zu Doue.**
Lavaromp bennozh d'an Aotroù hon Doue. - **Just ha santel eo.**

Prefas Suliou ar bloaz I

E gwirionez, Tad santel, Doue hollc'halloudek ha peurbadel,
un dra just ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep amzer, dre Jezuz Krist, hon Salver.

Eñ hag en deus gant mister e Bask kaset da benn
un oberenn vurzhdus,

hon tennañ eus sklavelezh ar pec'hed hag ar maro,
evit hon gervel da gaout perzh en e c'hloar hag en e vuhez.

Ha bremañ e c'hellomp dougen anoioù dispar
pobl dasprenet, pobl dibabet,
broad santel a rouaned hag a veleion.

Hag ec'h embannomp e pep lec'h oberoù kaer ho kalloud,
c'hwi hag hoc'h eus hon laketa da dremen
eus an deñvalijenn d'ho sklerijenn.

Rak-se unanet gant an Aeled hag an Arc'haeled
ha gant holl Speredoù galloudus an Neñvoù,
e kanomp meuleudi d'ho kloar en ur lavarout da viken :

Sanktus

Santel, Santel, Santel,

An Aotroù Doue, mestr ar bed!

Leun eo gant ho kloar an neñv hag an douar.

Hozanna e barr an Neñvoù!

Ra vo benniget an hini a zeu en ano Doue.

Hozanna e barr an Neñvoù.

Kredo (an Ebestel)

Me 'gred e Doue, an Tad hollc'halloudek,
krouer an Neñv hag an Douar,

Hag e Jezuz Krist,
E Vab unganet hon Aotrou,
a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel,
ganet gant ar Werc'hez Vari,

En deus gouzañvet dindan Pons-Pilat,
A zo bet kroaz-staget, marvet ha sebeliet,
A zo diskennet d'an ifernioù,

D'an trede deiz ez eo savet a varv da vev,
pignet d'an Neñv
emañ azezet en tu dehou d'an Tad hollc'halloudek,
ac'hano e teuio da varn ar re vev hag ar re varv.

Me 'gred er Spered Santel,
en Iliz santel, katolik,
e komunion ar Sent,
e pardon ar pec'hedoù.

Gortoz a ran adsav ar re varv da vev,
Hag ar vuhez peurbadus.
Amen – Evel-se bezet graet.

LID AN EUKARISTIEZH

KINNIG AR BARA HAG AR GWIN

Ar Beleg:

Pedit, ma breudeur, ma plijo gant Doue an Tad degemer ma Sakrifis
a zo ivez hoc'h hini.

Ar Bobl:

- **Evit gloar e ano ha silvidigezh ar bed a-bezh,**

KANTIKOU BREZHONEK

Bedenn : Kent ho kuitaat

- 1 Kent ho kuitaat, Jezuz hon Aotrou,
E c'houlennomp holl ho pennozh :
Amañ e lezomp hon c'halonoù,
Hon diwallet a-hed an noz.
Kent ho kuitaat Jezuz hon Aotrou,
E c'houlennomp holl ho pennozh.
- 2 O Mari, hon Mamm muiañ karet,
Roet dimp ho pennozh ivez :
'Vit hon miret ouzh an droukspered
Chomet e kichen hon gwele.
O Mari; hon Mamm muiañ karet,
Roet dimp ho pennozh ivez.
- 3 O Ael mat mignon karantezus,
Hon difennet ha deiz ha noz;
Pa deuy hon maro, pedet Jezuz
D'hon degemer er Baradoz.
O Ael mat mignon karantezus,
Hon difennet ha deiz ha noz.

An angelus

En azvent

- 1 Un arc'hael a-berzh an Aotrou
A ziskennas eus an Neñvoù
D'anoñs da Vari oa choazet
Evit Mamm da Salver ar bed
- 2 Mari a respontas neuze :
« Servijerez on da Zoue :
« Bezet eta graet em andred,
« Ar pezh hoc'h eus din diskleriet. »
- 3 An eil Ferson eus an Drinded
Kenkent a zo bet inkarnet;
Bebet en deus war an douar
O c'hortoz mervel er C'halvar.
- 4 Pedet, o Gwerc'hez, Mamm Doue,
Evidomp holl e vajestez,
Ma vezimp din eus ar grasoù
A ofr dimp Jezuz hon Aotrou.

Amzer bask

- 1 Mari, Rouanez an Neñvoù,
Disec'het breman ho taeroù,
Ha selaouet hon c'hantikoù,
Alleluia!
- D Alleluia - Alleluia – Alleluia!**
- 2 Ar Mab hoc'h eus gwechall douget,
War ar maro en deus trec'het,
Evel m'en devoa hen laret,
Alleluia!
- 3 Mamm Jezuz leun a drugarez
N'ankouait ket ho pugale,
Hag evidomp pedet Doue,
Alleluia!

Gloria

Gloar da Zoue e barr an neñvoù :

- **Ha peoc'h war an douar d'an dud a blij dezhañ.**
- Bezit meulet!
- **Bezit trugarekaet!**
- Bezit adoret !
- **Bezit enoret!**
- Bezit benniget evit ho kloar dispar!
- **Aotrou Doue, Roue an Neñv, Doue an Tad hollc'halloudek.**
- Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz;
- **Aotrou ha Doue, Oan Doue, Mab an Tad.**
- C'hwi hag a zilam pec'hed ar bed, ho pet truez ouzhimp;
- **C'hwi hag a zilam pec'hed ar bed, degemerit galv hon pedenn;**
- C'hwi azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez ouzhimp :
- **Rak c'hwi hepken a zo santel,**
- C'hwi hepken eo an Aotrou,
- **C'hwi hepken eo an Uhel-meurbet, Salver Jezuz,**
- Gant ar Spered Santel e gloar Doue an Tad.
- **Amen**

LID AR GOMZ SANTEL

Kemennadur an A viel.

An Aotrou Doue ganeoc'h.
Pennad eus an Aviel Santel
hervez...

- **Ha gant ho spered.**
- **Gloar deoc'h-c'hwi,
Aotrou Krist.**

Boude an Aviel.

Setu komzoù Jezuz Krist!

- **Meuleudi deoc'h, Salver Jezuz.**

Lidou-digeriñ

+ En ano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel. Amen.

Ar Salud d'an Ilizad

Ra vo gras hon Aotrou Jezuz Krist, karantez Doue an Tad, hag una-niezh ar Spered Glan, ganeoc'h-c'hwi holl bepred!

- **Ha gant ho spered.**

Lid ar Binijenn

Ma breudeur, anzavomp hon pec'hedoù dirak Doue, ha goulennomp e bardon, ma vimp e stad da lidañ an Oferenn Santel.

- **Me anzav ouzh Doue hollc'halloudek hag ouzhoc'h, ma breudeur, em eus pec'het bras, dre soñj, dre gomz, dre ober ha dre lezober. Dre ma faot, dre ma faot, dre ma brasañ faot!**

Rak-se e c'houlennan digant an Itron Varia bepred gwerc'hez, digant an Aeled hag an holl Sent, ha diganeoc'h, ma breudeur, pediñ Doue evidon.

Ar Beleg

Plijet gant Doue hollc'halloudek kemer truez ouzhimp, pardonin dimp hon pec'hedoù, hag hon ren d'ar vuhez peurbadel.

- **Amen.**

Kirie

Aotrou Doue, ho pet truez.
Aotrou Krist, ho pet truez.
Aotrou Doue, ho pet truez.

- **Aotrou Doue, ho pet truez.**
- **Aotrou Krist, ho pet truez.**
- **Aotrou Doue, ho pet truez.**

E-pad ar bloaz

- 1 Ni ho salud gant karantez,
Mari Rouanez an Aeled,
C'hwi a zo benniget, o pia!
Hag a c' hrasoù karget, Ave Maria!
- 2 Ra vezo meulet ho pugel
E pep lec'h, o Gwerc'hez Santel
Kanomp gant an Aeled, o pia!
E veuleudi bemdez, Ave Maria!
- 3 Ganeoc'h e c'houlennomp ivez
Hon sikour 'n hon diwezhañ deiz;
Hag obten gant Jezuz, o pia!
Dimp ur maro eürus, Ave Maria!

Eürus an hini

**D No Eürus an hini a garo Doue
Eus e holl galon hag e holl ene. (2w)**

- 1 An den a blijio da Zoue hon Tad
A zo diwallet ha diwallet mat.
- 2 En ti hag er park, en deiz hag en noz,
Doue warnezhañ a skuilho bennozh.
- 3 Gantañ e bried hag e vugale
O devo o lod e bennozh Doue.
- 4 Evel ur wezenn, douret he gwrizioù,
Dougen a ray frouezh, delioù ha bleunioù.
- 5 Mar deo pinvidik e ray vad d'ar paour,
E zorn a vo prest bepred d'hen sikour.
- 6 Mar n'en deus danvez, en deus kalz gwelloc'h :
Ur galon yac'hus, glan ha leun a beoc'h.
- 7 Laouen er vuhez, laouen er maro,
Gant an Aeled mat d'an Neñv e pigno.
- 8 Kerner hep dale hent ar Baradoz
En doujañs Doue, bep mintin, bep noz.

Meulomp holl da jamez

D Meulomp holl da jamez Doue Jeun a vadelezh (2w)

- | | |
|--|---|
| 1 Kanet, Aelez, d 'hon Aotrou
Ho kantikoù kaerañ,
Benniget anezhañ
Ganimp eus e holl c'hrasoù. | 3 Pastor karantek-rneurbet,
Na espern ket e boan,
Klask a ra hep ehan
An dañvad kaezh dianket. |
| 2 Biskoazh tad ne voe gwelet
Ken mat d'e vugale,
Ken soursius noz-deiz
D'o diwall korf ha spered. | 4 Eñ eo ma finvidigezh,
Ma nerzh ha ma skoazell
Rak-se betek mervel
Me gano e vadelezh. |

Karet Doue da gentañ

- 1 Karet Doue da gentañ,
Ma ene,
Karet Doue da gentañ:
Er poaniou, er joa, hed hoc'h holl vuhez,
A-galon bezet gentañ.
- D Karet Doue, da gentañ,
Ma ene,
Karet Doue da gentañ.**
- 2 Disprizet madoù ar bed,
Milliget,
Disprizet madoù ar bed,
N'int netra nemet ludu ha moged ;
Ar pinvig eo neb a bed.

Gwerz Itron Varia ar Giodet (LARUEN)

D M'ho salud, Mari, Mamm Salver ar bed, Gwerc'hez a viskoazh ha Gwerc'hez bepred, M'ho salud, Mari, Itron ar Giodet.

- 1 M'ho salud, Mari, 'lavaras an Ael,
M'ho salud, Mari, 'lavar ar bugel.
- 2 M'ho salud, Mari, pedenn ar c'hristen,
M'ho salud, Mari, Mamm ar Vretoned.

Reine de l'Arvor

D Reine de l'Arvor, nous te saluons, Vierge Immaculée, en toi nous croyons (bis)

- 1 Partout et toujours, ô Vierge Marie,
Tu fus des Bretons la Dame chérie.
- 2 Jadis nos aïeux, soumis à ta loi,
Sans rien réserver t'ont donné leur foi.
- 3 Et de ce passé, le pacte demeure,
Comme au premier jour, à la première heure.
- 4 Notre chère Arvor vit de tes bienfaits;
Nous sommes tes fils, tes fils pour jamais.
- 5 Mère bénis-nous, bénis tous les âges;
Bénis nos moissons, bénis nos rivages.
- 6 Bénis nos foyers, bénis nos enfants,
Bénis avec nous tous les chers absents.
- 7 Bénis nos soldats, bénis nos marins,
Aide-les partout à vivre en chrétiens.
- 8 Et de tes bienfaits, toute notre vie,
Nous nous souviendrons, ô Vierge Marie!
- 9 Car tous tes enfants, ô douce Marie,
Attendent par Toi l'éternelle vie.
- 10 Et tous, près de Toi, dans le Ciel, un jour,
Veulent être unis, ô Mère d'amour.

Notre-Dame des Fontaines (PONTRIEUX)

- R Notre-Dame des Fontaines,**
A vous nous avons recours,
Dans nos joies et dans nos peines,
Ah! secourez-nous toujours...
- 1 Votre béni sanctuaire
Plein de charmes et d'attraits,
D'une bonne et tendre- Mère,
Nous rappelle les bienfaits.
- 2 Devant votre douce image,
Nous sommes venus souvent
Demander dans le jeune âge
Le cœur pur de l'innocent.
- 3 Dans les combats de la vie,
A vous nous avons recours,
Et toujours, Mère chérie,
De vous l'on reçoit secours.
- 4 Sous votre égide la mère
Place son petit enfant;
En vous le marin espère
Lorsque mugit l'océan.
- 5 Puissions-nous, Sainte Patronne,
En votre Céleste Cour,
Porter des Saints la couronne
Et vous dire notre amour.

Gwerz Itron Varia Rostren (ROSTREN)

D Mamm santel da Zoue, Itron Varia Rostren,
Rouanez ar gêr-mañ, selaouet hon fedenn,
Digoret ho tivrec'h, digoret ho kalon,
Da rein d'ho pugale ho pennozh, o Itron!

- 1 O Gwerc'hez, rozenn gaer, o fleurenn vinniget,
A-zindan ur vodenn en amzer gozh savet :
War lavar Alberzh Vras, da greiz kalon ar goañv,
Er bloavezh trizek kant oc'h bet kavet amañ.
- 2 Gant an den gouiziek-rmañ, diouzh klevet ar re gozh,
'Save e-mesk an drez aman ur vodenn roz;
Hag en pep koulz ar bloaz, ar vodenn bepred glas
A daole bokedoù betek kreiz ar goañv bras.
- 3 Un dra ken souezhus el lec'h-man degouezhet,
Hag a vije bemdez gant pep-unan gwelet
A lakaas hon zud kozh da sellet pizh aze,
'Vit ma vije gouezet petra oa kement-se.
- 4 Dont a rejont d'ar bod, dindanañ 'voe toullet,
Hag ouzh treid ar gwrizioù kenkent e voe kavet
Ar c'haerañ penn Gwerc'hez, livet brao ha seder,
Evel 'mañ e Rostren brernañ war an aoter.

Enor ha gloar

D Enor ha gloar da virviken
Da Jezuz-Krist, Doue ha den
Roue ha tad e grouadurien

- 1 Gwechall e vrec'h holl c'halloudus
A hadas ar stered lintrus
Tro-war-dro d'e dron peurbadus.
- 2 Eñ en deus krouet an aeled,
Koantoc'h evit heol ha stered,
D'e servijiñ ha d'hon miret.
- 3 Gant ur gomz hepken e lakas
An dour da vont kuit er mor bras:
Disec'h an douar a chomas.
- 4 War ar parkoù noazh ha hudur
Kenkent e ledas ar glazur,
Bleunioù 'n e douez ha magadur.
- 5 An den ivez 'zo graet gantañ,
Kement hon eus a zo dezhañ,
Koulz er bed all hag er bed-mañ.
- 6 O pegen kreñv dorn hon Roue,
Kreñvoc'h a gavan koulskoude,
Pa soñjan en e garantez.
- 7 Diskenn en ur c'hraou evidomp,
Bevañ paour ha sempl evidomp,
Gant e vouezh kelenn ac'hanomp!
- 8 Mervel er groaz war ar C'halvar
Evit bugale ken digar
Stag o c'halon ouzh an douar.
- 9 Mari, e Vamm hag hon Mamm vat,
Deut ganimp da drugarekaat
Jezuz hon Roue hag hon Tad.

Spered Santel

- 1 Spered Santel, holl nerzh ar bed kristen,
Plijet ganeoc'h ennomp bremañ diskenn :
A sklerijenn karget hon sperejoù,
A garantez tommet hon c'halonoù.
- 2 An Ebestel, en ur sal unanet,
dan ho kras hoc'h eus gwechall nerzhet-
Be evidomp ar memes madelezh,
Nan omp hepoc'h nemet sempladurezh.
- 3 Gwer' ez Vari, esparañs ar pec'her,
Pedet Jezuz Mab hag hon Salver;
Obtenet dimp kompren komzoù Doue,
Ra da viken o miret goude-se.

Da Feiz hon tadoù kozh

**D Da feiz hon tadoù kozh, ni paotred Breizh-izel,
Ni zalc'ho mat atao.
'Vit feiz hon tadoù kozh, hag en-dro d'he banniel,
Ni holl en em stardo;
Feiz karet hon tadoù, morse ni ho nac'ho,
Kentoc'h ni a varvo,
Kentoc'h ni a varvo, kentoc'h ni a varvo**

- 1 Keit ha ma lugerno, e bolz uhel an neñvoù,
Ha stered hag al loar, gant an heol benniget,
Ni a gerzho divrall gant hent ar gourc'hemennoù,
Hag a vevo dalc'hmat 'vel gwir gatoliked...
- 2 Kentoc'h evit plegañ d'an avel foll kounnaret,
An dero bras a dorr, hep chal gant ar maro;
'Vel-se ni zalc'ho penn d'ar bed ha d'an droukspered.
Plegañ ne raimp biken! kentoc'h ni a dorro l
- 3 Ni 'zo Bretoned yac'h, dispont e-giz hon Tadoù;
Berviñ a ra ennomp kalon ar gwir soudard.
Ur Breizhad hag a dro da-heul ar fals-kredennoù
N'eo ket ur gwir Breizhad, n'eo nemet un trubard.

Iliz ma farouz

**D Salud deoc'h iliz ma farrouz
Salud iliz ma zadoù kozh,
Ma c'halon a zeu da dommañ,
Iliz santel, pa ho kwelan.**

- 1 Ma c'halon a zeu da dommañ,
Ha ma daoulagad da ouelañ,
P'ho kwelan, iliz venniget,
Rak ennoc'h on bet badezet.
- 2 Salud d'an tour 'zo war e benn,
Kroaz hor Salver, sin ar c'hristen,
'Zo en e greiz kleier o son
E pep mare hag e pep ton.
- 3 Din me, devezh ma badeziant,
Kleier sakret, c'hwi sone drant,
Ha pa zeuy devezh ma maro,
C'Hwi, truezus, din a sono

- 4 Ma zud, em raok, pell 'zo amzer,
A leze labour ha tier,
Bep sul, bep gouel, evit diskuizh
Gant Jezuz amañ 'n hon iliz.
- 5 Aman ez on bet divec'het
Gant ar beleg eus ar pec'hed;
Tañvaet am eus ouzh an daol-rmañ
Jezuz evit ar wech kentañ,
- 6 Chom a rin betek ar maro,
Tost d'am iliz, e-kreiz ma bro,
Me fell din bezañ interet
Gant ma zud kozh en hor bered.
- 7 Deiz ar vam, p'hon galvo Doue,
Bev e savimp holl eus ar bez,
Da vont eus iliz ar barrouz
Trezek iliz ar Baradoz.

Itron Varia Sant-Kare (LANVELEG)

- D Itron Varia Sant-Kare,** 2 Kriz've ar galon na frailhje
O Mamm Jezuz, Mamm a druez, O welet Mari d'abardaez,
Goulennet evidon pardon : He Mab war he barlenn ganti
C'hwi 'zo ma Mamm ha ma Itron. Ha hi 'pokat d'ar pemp gouli
- 1 Goulet ma chomo gras Doue 3 Itron Varia a Druez,
En em c'halon, Mamm a druez; Miret o Feiz d'hon bugale;
Pa vin gant Doue arri mat, En Breizh-Izel, o ma Itron,
Em bo aezetoc'h ma mennad. Dalc'het ar gwir Relijion.

Kantik ar bugel d'ar Werc'hez (PERROZ-GIREG)

**D Gwerc'hez ni a zo ho pugale
Hag ho kar evel hon zud kozh;
Hon diwallet holl korf hag ene
Ma 'c'h efomp holl d'ar Baradoz.**

- 1 Pa oan bugelig e-barzh ar ger
Ma mamm lare din alies :
Me nen on nemet ur vamm dister,
Ur vamm all hoc'h eus, ar Werc'hez.
- 2 Pan ven en drubuilh, pe re nec'het,
D'ho ti e tiredan buan,
Ha ma c'halon n'em gav disammet
P'en devez laret deoc'h e boan.
- 3 D'an tad ho ped, ha d'ar vamm gristen,
Ma chomo fur o bugale,
C'hwi roy, Gwerc'hez, nerzh ha sklerijenn
D'o ren ervat korf hag ine.

Itron Varia an Enez (GOUDELIN)

- D Itron Varia an Enez,** 2 C'hwi 'zo hon douster, hon buhez
Diskennet ur sell a druez, Hon esparañs war-lec'h Doue;
War ho pugale daoulinet Nep n'ho kar ket, o Rouanez,
En-dre d'ho Skeudenn venniget. Deus Breizh-Izel n'eo ket hennezh
- 1 Hirie 'vel gwechall hon Tadoù, 3 O Gwerc'hez galloudus ha mat
E teuomp e-leizh an heñchoù Un deiz, serret hon daoulagad;
Da glask sikour ho madelezh, Gret ma kavfomp en Neñv, un deiz,
Itron Varia an Enez. Eürusted, gloar, ha levez.

Bedenn da Werc'hez Vu/ad (BULAD-PESTIEN)

**D Gwerc'hez Vulad, Itron Vari,
Harzet peb droug d'hon glac'hariñ;
Roet dimp bennozh, roet dimp souten,
Miret 'n hon zouez ar feiz gristen!**

- 1 War ar mor bras dianket, e-kreiz an noz du-dall,
Ha tro-war-dro, an avel gant kounnar o yudal,
An den a vor a greñva e fiziañz, e bedenn,
Dirakañ, 'kreiz an oabl-du, pabar eur steredenn.
- 2 Ni'zo ivez dianket 'kreiz mor ar bed treitour,
Hag en-dro dimp o krozal an avel hag an dour,
Avel diwar an ifern ha dour don ar pec'hed,
Du an oablenn, du an noz, hon c'halon 'zo nec'het.
- 3 Dre holl, enep da Zoue, a zo hirie brezel,
Paret, steredenn Vulad, a-us da Vreizh-lzel;
Miret hon bro da Zoue, miret hon bro kristen,
Ni ho ped a-greiz kalon, selaouet hon fedenn.

Itron Varia Wir-Sikour (GWENGAMP)

- | | |
|---|--|
| 1 Salud deoc 'h, o Gwerc'hez vinniget,
Pa deu warnomp an abardaez,
E teuomp d'ho pediñ, Mamm garet,
Da ginnig deoc'h hon c'harantez! | 1 Salut à Toi, Vierge bénie,
Quand va disparaître le jour,
Nous venons te prier, Marie,
Et t'offrir encore notre amour. |
| D Selaouet hon fedenn a galon,
Mamm c'hwi eo bepred hon rikour :
Bezef evit biken hon Itron,
Itron Varia Wir-Sikour (2w) | R Écoute ce cri de notre âme,
Mère à toi nous avons recours
Toujours pour nous sois Notre-Dame,
Notre-Dame de Bon-Secours (bis) |
| 2 Mamm ar grasoù a deu eus Doue,
Diouzh ar pec'hed hon diwallet,
Goulet na vo kammed hon ene
Gant e roud mezhus mastaret! | 2 Mère de la divine grâce,
Du péché sauve tes enfants;
Que jamais sa honteuse trace
Ne souille leurs cœurs innocents. |
| 3 'Vit ho pugale bet an difenn,
O Mamm dener, 'kreiz ar brezel;
Bet o Frovidañs en pep tachenn,
Bremañ, ha pa vo ret mervel ! | 3 De tes enfants sois la défense,
Tendre Mère dans les combats;
Sois leur visible Providence,
Maintenant et jusqu'au trépas. |

Jezuz a lar dimp pediñ

**D Savet eta, ma ene,
Pignet betek tron Doue :
Ar bedenn a roy deoc'h divaskell greñv,
D'ho tougen, us d'an oabl, e lein an Neñv.**

- | | |
|--|--|
| 1 Jezuz a lar dimp pediñ
Bepred kuit a zihan;
Outañ e fell din sentiñ,
Eürus on pa bedan. | 6 Pediñ ran en ilizoù,
'Tal an Aoter stouet,
Oc'h adoriñ hon Aotrou
A chom eno kuzhet. |
| 2 'Dal ma strink ar sklerijenn,
E pedan d'ar beure;
D'an noz, en deñvalijenn,
E pedan adarre. | 7 Dalc'hmat keit ha ma c'hellin,
E pep oad, e pep bro,
Evel bremañ e pedin
Betek eur ar maro. |

Kantik Breuriez ar Feiz

**Breudeur, ni glev ho klemmoù eus an tu all d'ar Mor,
D'ho mouezh ha d'hoc'h ezhommoù, hon c'halon 'zo digor :
Ni a roio aluzen evit sikour ho pro,
Ni a savo beleien ha deoc'h ni o c'haso.**

Kristenien a Vreizh-lzel, ho pet truez ouzhimp,
An eürusted eternal, an Neñvoù a fell dimp,
Rak ni 'zo, war an douar, tud paour hag emzivad,
N'anavezomp, c'hwi hen goar, na Jezuz nag e Dad.

Tremen 'ra pep tra

- | | |
|---|---|
| D Selaou, ma breur ker,
Tec'hel ra an amzer,
Tremen 'ra pep tra,
Nerzh, madoù, yec'hed,
Yaouankiz ha kened :
Tremen 'ra pep tra (2w) | 2 Berr eo pep devezh,
N'eo ket hir ar vuhez,
Tremen 'ra pep tra.
Klaskomp hep dale
Sovetaat hon ene :
Tremen 'ra pep tra. (2w) |
| 1 Skeudenn da vuhez
Eo al lestr o vale,
Tremen 'ra pep tra;
E roudoù, er mor,
A gloz kerkent digor :
Tremen 'ra pep tra. (2w) | 3 Kant mil vloaz amzer
A zo c'hoazh gwall dister :
Tremen 'ra pep tra;
Nemet c'hwi Doue
Hag an eternite,
An eternite. (2w) |

En an' Doue hon sikouret

D Breudeur, kerent ha mignoned, En an' Doue, hon selaouet, En an' Doue, hon sikouret!

- | | | | |
|---|--|---|---|
| 1 | Allas, ne oufe den kompren
Pegen estlamm eo hon anken;
hon finijenn a zo kalet,
En an' Doue hon sikouret ! | 3 | Ni n'hellomp ket dre bedenoù
Distan na berraat hon foanioù
Doue ouzhomp ne selaou ket
En an' Doue hon sikouret ! |
| 2 | Sonjit en ho tad, en ho mamm,
Er Purgator, e-kreiz ar flamm :
Ma mab, ma merc'h, a! selaouet,
En an' Doue, hon sikouret ! | 4 | Kalz a c'hellit dre ho poanioù
Ho yunioù hag oferenoù :
Ken didruez na vezit ket,
En an' Doue hon sikouret ! |

Jezuz pegen bras ê !

D Jezuz pegen bras ê! Plijadur an ene, Pa vev en gras Doue Hag en e garantez

- | | | | |
|---|--|---|---|
| 1 | Berr kavan an amzer
Hag ar poanioù dister,
O soñjal deiz ha noz
E gloar ar Baradoz. | 5 | Doriou ar Baradoz
Digor ouzh ma gortoz
Ar sent, ar santezed,
War o zron azezet. |
| 4 | Pa sellan en Neñvoù
Etrezek ma gwir vro,
Nijal di a garfen
Evel ur goulmig wenn. | 6 | Me 'c'hello, evit mat,
Gwelet Doue an Tad
Gant e Vab eternel
Hag ar Spered Santel |
| 5 | Gant joa e c'hortoan
An termen diwezhañ ;
Hast am eus da welet
Jezuz ma gwir bried. | 7 | Pegen dous 'vo klevet
Jezuz din o laret :
« Deut, servijer fidel,
« Deut d'ar c'hloar eternel. » |
| 4 | Goude taol ar maro
Joaüs me a gano :
Torret eo ma chadenn,
Libr on da virviken! | 8 | Eürusted hep he far,
A-vremañ me ho kar,
Ennoc'h 'dal ma sonjan
Divec'h en em gavan. |
| | | 9 | Em holl boanioù kalet
A gorf hag a spered,
Me soñjo deiz ha noz
E gloar ar Baradoz. |

Sainte Anne, O Bonne Mère

- | | | | |
|--|--|--|--|
| D Sainte Anne, ô Bonne Mère,
Toi que nous implorons,
Entends notre prière
Et bénis tes Bretons. | 2 | Fais que la Sainte Église
Répande en liberté,
Sur la terre soumise,
L'auguste vérité. | |
| 1 | Quand l'erreur se déchaîne,
Pour vaincre notre foi,
Puissante souveraine,
Nous espérons en toi. | 3 | O Sainte Anne, ô Marie,
Nos vœux montent vers vous
Sauvez notre patrie,
Priez, priez pour nous. |

Kantik Sant Erwan

D Nan eus ket en Breizh, nan eus ket unan, Nan eus ket ur Sant evel Sant Erwan. (2w)

- | | |
|---|---|
| 1 | N'eus ket en Argoad, na mui en Arvor,
Koulz ha sant Erwan, 'vit an dud a vor. |
| 2 | Nan eus ket er vro, dre-holl e larer,
Hag a ve ken mat 'vit al labourer. |
| 3 | N'eus ket kaeroc'h skouer d'an dud a lezenn,
Evit Sant Erwan, skouer ar veleien. |
| 4 | Ha d'ar bevien gaezh, ha d'an dud a boan,
Nan eus ket gwelloc'h evit sant Erwan. |
| 5 | Mar fell deoc'h an tu da gât ho mennad,
Pedet sant Erwan, ha pedet ervat. |
| 6 | Gant tud a bep stad, uhel hag izel,
E peder Erwan a-dost hag a-bell. |
| 7 | 'Yit an holl e oa leun a garantez,
Evel gwir vreudeur o degemere. |
| 8 | C'hwi oa alvokad pa oac'h er bed-rmañ
Bet hon alvokad en Neñvoù bremañ. |
| 9 | Pedomp, Bretoned, pedomp sant Erwan,
Brasoc'h sant 'vitañ nan eus ket unan. |

Sant Jozef, Pried Mari

- D Sant Jozef, Pried Mari,
Tad mager da Jezuz,
Ni fel! d'imp hoc'h enoriñ
Patron karantezus.**
- 2 Jezuz a bleg d'ho pedenn
'vel e vamm, ho pried :
Teurvezet'ta din goulenn
Ar c'hras ma vin salvet.
- 1 Mirer choazet gant Doue
D'e Yab ha d'ar Werc'hez,
Bet hoc'h eus en ho puhez
Anken ha levenez.
- 3 Pa vin galvet gant Doue,
Patron ar maro mat,
Deut gant un dorn a druez,
Serret ma daoulagad.

Mamm an Itron Varia

- D Mamm an Itron Varia
Ha Mamm ar Vretoned,
O Itron Santez Anna,
Ni ho karo bepred.**
- 3 War ar maez e Breizh-lzel,
Pa c'hoantaer diskuizhañ,
Ouzh an Neñv 'reer ur sell
O tont holl da ganañ :
- 1 Anvet oc'h bet a bell'zo
Patronez Breizh-lzel,
Hag a viskoazh en hon bro
Deoc'h ez omp bet fidel,
- 4 War ur mor leun a reier
Omp, siwazh, er bed-mañ!
Diwallet hon bag dister,
Itron Santez Anna!
- 2 'Vel hon zud kozh Bretoned,
Hon fiziañs ar vrasañ
Ennoc'h a lakomp bepred
Itron Santez Anna.
- 5 Bugale kaezh da Eva
Ni a glask hon gwir vro;
O Itron Santez Anna,
D'an Neñv c'hwi hon reno

Rouanez karet an Arvor

- D Rouanez karet an Arvor,
O Mamm leun a druez
War an douar, war vor,
Miret ho pugale.**
- 2 Ho kalon zo digor
Vit an holl Vretoned
An dud eus an Arvor
Ho kar ivez bepred.
- 1 Itron Santez Anna,
Ni ho ped a galon,
Gant joa ni 'n em laka
Dindan ho proteksion.
- 3 Itron leun a zouster,
En holl hon ezhommoù,
Diskouezet 'n hon c'heñver
Galloud ho pedennoù.

Baradoz dudius

- D Baradoz dudius,
Bro ar Sent eo ma bro!
A! pegen evurus
E vin me bepred eno.**
- 3 Skuizh ha melkoniet
En draonienn-man a zaeroù,
Ma Jezuz, me ho ped
D'am degemer en Neñvoù.
- 1 Eus ar bed ankenius
Pegoulz ec'h in d'an Neñvoù ?
Pell diouzhoc'h, ma Jezuz;
N'eus nemet poan ha daeroù !
- 4 O peoc'h, o joaüsted,
Ma Jezuz ha ma Doue,
Na pebezh eürusted,
E-pad an eternite!
- 2 O pegen glac'harus
Eo bevan barzh ar pec'hed !
Pegoulz, o ma Jezuz,
E vezin-me divec'het ?
- 5 Neuze, o ma Jezuz,
Me a gano deiz ha noz :
« Gloar deoc'h, Tad truezus,
« Ha da Vari mil bennozh! »

Ofromp d'an Neñv

- D Ofromp d'an Neñv ar Sakrifis
Nan eus netra a gen kaer priz,
Evel Jezuz stag ouz e Groaz,
War an Aoter o tiskenn c'hoazh.**
- 3 'Vit trugerekaat hon Aotrou
Eus kement a vadelezhoù,
Warnon ha war an holl skuilhet,
Aboe m'en deus krouet ar bed.
- 1 En oferenn, e gwirionez,
Korf ha gwad Jezuz Mab Doue,
E-lec'h ar bara hag ar gwin
Amañ dirazon a welin.
- 4 Bremañ-souden, o ma Salver
E tiskennfet war an aoter;
Karget a feiz kreñv ma ene,
Ha ma c'halon a garantez.
- 2 Gant ar beleg me a fell din
Kinnig ivez an Oan divin,
'Vit adoriñ 'vel m'eo dleet
An tri Ferson eus an Drinded.
- 5 Ha c'hwi bet soñj. Gwerc'hez Vari,
Hoc'h eus hen ganet 'vidomp-ni;
Taolet warnezhañ ha warnon
Ur sell a vamm, sell ar galon.

Mle ho salud, Korf ma Salver

- | | |
|---|--|
| 1 Me ho salud, Korf ma Salver
'Zo diskennet war an Aoter :
Ennoc'h ar bara zo chenchet,
Ha ganeoc'h e vezin maget. | 2 Me ho salud, o Gwad divin,
'Zo er c'halir e-lec'h ar gwin
C'hwi evidon 'zo bet skuilhet,
Deut d'am gwalc'hiñ a bep pec'hed. |
|---|--|

Aeled eus ar Baradoz

- Aeled eus ar Baradoz, sellet pebezh enor
A ra dimp er Sakramant Jezuz hon Redemptor
Ur wech evit hon prenañ ec'h eo bet inkarnet,
Hag evit dont d'hon magañ ganimp e chom bepred!
- Mari, gwir Vamm da Jezuz, Mari, ma Mamm dener,
Ma sikouret da resev ho Mab ha ma Salver ;
Me nen on siwazh netra, netra nemet pec'hed,
Mes ennoc'h ec'h esperan, o ma Mamm benniget.
- Krouer an Neñv, an douar, war an aoter bemdez,
Dre gomz nerzhus ar beleg a ziskenn a-nevez :
Un Doue kalz uheloc'h evit ar firmamant,
En em izela dindan spesoù ar sakramant.

Adoromp holl

- Adoromp holl e Sakramant an Aoter
Gwir Vab Doue, Jezuz hon Mestr, hon Salver :
Sperejoù evurus, priñsed eus e balez,
Adoret-añ ganimp, meulet-añ da jamez,
Meulet-añ da jamez. (2w)
- Dre drugarez evidomp holl inkarnet,
Dre garantez en Osti santel kuzhet,
Deut, ma Salver Jezuz, eus an Aoter, ho tron,
Da reiñ dimp holl bremañ ho penediksjon,
Ho penediksjon. (2w)
- Enor ha gloar ha karantez eternal,
D'an Tad, d'ar Mab, ivez d'ar Spered Santel
Meulomp hag adoromp tri Ferson en Doue,
E-pad an holl amzer hag an eternite,
Hag an eternite. (2w)

Kanomp a vouezh uhel

- | | |
|---|---|
| 1 Kanomp a vouezh uhel
Mari Mamm Doue,
Rouanez Breizh-lzel
Hag hon Mamm ivez. | 4 War gern ar menezioù,
Mesaer ar deñved
A gan ho kantikoù
E-kreiz e loened. |
| D Da Vari, meuleudi
E pevar c'horn ar vro!
Hon Breizh-ni 'zo dezhi,
Ha dalc'hmat a vezo. | 5 Lies e lein an aod,
Liesoc'h war vor,
E ped ar martolod
Steredenn Arvor. |
| 2 En o holl bedennoù,
Gwerc'hez venniget,
E vec'h e kalonoù
An holl Vretoned. | 6 Pa son teir gwech bemdez
Kloc'h an Anjeluz,
E laromp teir Ave
Deoc'h-hu, Mamm Jezuz. |
| 3 Bep mintin, ar poaniour,
D'an daoulin stouet,
A-raok mont d'e labour,
Ho kalv d'hen miret. | 7 Evit plijout dezhi
Hag obten grasoù,
Heuilhomp eün evelti
Hent ar vertuzioù. |

Kanomp holl meuleudi da Jozef

Kanomp holl meuleudi Da Jozef pried Mari (2w)

- | | |
|--|---|
| 1 Piv a c'hello ho meuliñ,
Sant Jozef evurus,
Tad mager da Jezuz,
Pried d'ar Werc'hez Vari? | 3 Roue an hol! rouaned
Ouzhoc'h-hu a sente;
Ha gwir Vab ho Toue
Ganeoc'h a zo bet maget. |
| 2 War ho tivrec'h benniget
Hoc'h eus douget Jezuz,
War ho kalon joaüs
Pet gwech en deus-eñ kousket! | 4 O sant bras, evidon-me
Ur c'hras a c'houlennan
Deut em eur diwezhañ
Da zegemer ma ene. |

Sant Jozef, ni ho supli

- | | |
|--|--|
| D O Sant Jozef ni ho supli,
En ano Jezuz ha Mari,
Douget hon pedenn da Zoue,
Ha sikouret ho pugale. | 1 Eveldoc'h ni garfe miret
Lezenn Doue e-kreiz ar bed,
Trec'hiñ war hon holl fallblegoù
Ha mont eün gant hent an Neñvoù |
|--|--|

Enor d'hoc'h ano benniget

- D Enor d'hoc'h ano benniget!**
Ra vezo gant an holl meulet, Mari.
Ra vezo gant an holl meulet!
- | | |
|---|---|
| 1 O Mamm dener, piv a laro,
An holl douster eus hoc'h ano, Mari. | 6 Jezuz, ho Mab eo hon Aotrou,
Ha c'hwi ltron hon c'halonoù, Mari. |
| 2 Ano Jezuz eo ar c'haerañ,
Ano Mari eo an dousañ, Mari. | 7 Me e veulo diouzh ar beure
Ha pa zeuy an noz adarre, Mari. |
| 3 Mari 'sinifi Rouanez,
ltron, Steredenn ha Mestrez, Mari. | 8 Em foaniou me hen meulo c'hoazh
Evit ma vo skañvoc'h ma c'hroaz, Mari. |
| 4 Hag un ano ken glorius
A oa dleet da Vamm Jezuz, Mari | 9 D'am frealziñ war ma maro
Ne c'houlan nemet hoc'h ano, Mari. |
| 5 Rak, mar deo Jezuz hon Roue,
C'hwi zo hon Rouanez ivez, Mari. | 10 Pa vo dija ma zeod sklaset,
Em c'halon me 'laro bepred, Mari. |
| | 11 Evurus mar gellan mervel
'N ur laret hoc'h ano santel, Mari. |

Kalon dous a Vari

Ave, Ave, Ave Maria ! (2w)

- | | |
|--|---|
| 1 Kalon dous a Vari,
Kalon Mamm Doue,
Ni fell dimp ho meuliñ,
Bremañ ha bemdez. | 6 Ur Vamm a galon vat,
Dreist an holl mammoù,
En hon c'heñver dalc'hmat
Ez oc'h en Neñvoù, |
| 2 Piv a c'hellfe laret,
Kalon druezus,
Pegement e karet
Bugale Jezuz ? | 7 Ar bed en deus ezhommm,
'N un amzer ken kriz,
Eus ur galon ken tomm
Ha kalon Mari. |
| 3 C'hwi hoc'h eus hen gwelet
'N ur c'hraou evidomp,
War ar plouz astennet,
Ha paour eveldomp. | 8 An Iliz hag ar Pab
'N ho trezek a sell,
Digant Jezuz ho Mab
Pa c'houlont skoazell. |
| 4 Ganeoc'h e Nazared,
Ho krouadur santel
En deus bet labouret
Da reiñ dimp kentel. | 9 Selaouet ouzh o mouezh,
Komzet ouzh Jezuz,
Ma vougo en hon touez
Ar brezel mezhus. |
| 5 'N e gomzoù diwezhañ,
Soñj hoc'h eus Gwerc'hez,
E lare deoc'h bezañ
Mamm an holl dud kaezh. | 10 Roet nerzh ha souten
Dimp ivez e Breizh,
Ha miret da viken
Ar Feiz vat 'n hon c'hreiz ! |

Jezuz Salver adorabl

- | | |
|--|---|
| 1 Jezuz, Salver adorabl, sellet ho pugale;
Stouet int holl d'an daoulin dirak ho majestez :
Hoc'h adoriñ a reont eus a-greiz o c'halon,
Sellit nê gant madelezh, eus an Aoter, ho tron. | 5 Evite hoc'h eus roet ho Kwad hag ho puhez,
Hag evite e chomit en Osti noz ha deiz :
Evite 'c'h eus digoret porzhioù ar Baradoz,
Gret maz aimp di d'ho meulin ha ganeoc'h da repoz! |
|--|---|

Sakramant ar c'haerañ

- D O Sakramant ar c'haerañ,
Lec'h 'teu Doue d'hon magañ :
Jezuz a zo amañ c'hoazh
Koulz ha gwechall war ar Groaz.**
- | | |
|--|--|
| 1 D'an Ebestel e lare
Ha d'ar veleien goude :
« Hemañ eo ma c'horf, debret,
Hernañ eo ma gwad, evet ». | 5 Diaes e vefe kompren ..
Krediñ a dleomp hepken :
Digoromp lagad ar Feiz
Hag e welfomp hon Doue. |
| 2 Ar beleg, er gorreoù,
A lar ar memes komzoù
Kenkent ha ken alies
Jezuz a sent ouzh e vouezh. | 6 Dont a ra d'hon ilizoù
Hep kuitaat lein an Neñvoù
Er burzhud-se e welomp,
Pegeit e kar ac'hanomp! |
| 3 Nen eus ken war an aoter
Nemet korf sakr hon Salver
E Gorf lec'h ar bara-kan,
Lec'h ar gwin, Gwad pur an Oan. | 7 Neb a resev e stad vat
Korf hon Salver hag e Wad,
Gantañ a zo unanet
A galon hag a spered. |
| 4 Ar spesoù o deus miret
O liv, o blaz 'vel bepred;
Kuzhet aze dindane
Emañ Korf ha Gwad Doue. | 8 O Kristenien, adoret
Jezuz ouzh e Groaz staget;
Adoret-añ en Neñvoù
Hag en e dabernakloù. |
| | 9 E pep lec'h, e pep amzer,
Meulomp Jezuz, hon Salver;
Dreist-holl karomp anezhañ
Er Sakramant ar c'haerañ! |

- D O Kalon Sakr eus ma Jezuz,
Kalon meurbet karantezuz,
Plijet resev, me ho supli,
An dezir am eus d'ho meuliñ**
- 1 C'hwi 'zo ar soursenn brisius
Eus ar grasoù kreñv ha nerzhus
A resevan da bep mare
Hag a doueh kement ma ene.
- 2 O Kalon Sakr, c'hwi zo un nor
Hag a welan bepred digor
Da zegemer ar bec'herien,
Pa fell dê ober pinijenn.
- 3 Torret em eus lezenn Doue
Kant ha kant mil gwech em buhez :
Muntrer euzhus, bugel divat,
Treuzet em eus Kalon ma Zad!
- 4 Pardonet c'hoazh an torfejoù,
An dismegañs, ar blasfemoù,
Graet eneb deoc'h gant ar re fall,
Ken gwazh hag er C'halvar [gwechall]
- 5 Unanomp brernafi hon mouezhioù
Ha laromp dre hon c'hantikoù :
Gloar d'ho Kalon, Salver Jezuz,
Gloar d'ho Kalon, Mamm druezus!

Ar Salver ec'h omp o c'hortoz

Rorate, cœli, desuper, et nubes pluant justum.

- 1 Ar Salver ec'h omp o c'hortoz,
Pegoulz eus lein ar Baradoz
E tiskenno d'hon disammañ
Eus ar bec'h a zougomp amañ?
- 2 C'hoant bras hon eus holl koulskoude,
Ma paro warnomp gouloù-deiz;
Teñval ha spontus eo an noz
Aboe pec'hed hon tadoù-kozh.
- 3 O! dont a ray hep pell dale,
Bugel, e-touez e vugale :
Nerzh a roy dimp ha sklerijenn
Mar karomp ober pinijenn.
- 4 Ouzh ur Werc'hez a Nazared
Un arc'hael en deus bet komzet
« Mar fell da Zoue, emezi,
« Me a vezo mamm ar Mesi. »

Deut, Salver ar bed

- D Deut, Salver ar bed, diskennet,
Eus a Satan hon disammet ;
Diskennet eus ar Baradoz,
Ni zo pell 'zo ouzh ho kortoz.**
- 1 War-lec'h pec'hed hon tad kentañ,
Eus Eden hoc'h eus hen skarzhet :
Aboe neuze, ni eveltañ,
Nag a dacroù hon eus skuilhet !
- 2 En ho madelezh koulskoude,
Daoust d'hon c'hrimou ec'h esperomp
O krediñ penaos hep dale
Ho torn a savo ac'hanomp.
- 3 O! ma vefe gwir ar c'heloù
Penaos zo bet e Nazared
Un arc'hael a-berzh an Aotroù
Gant un neventi kaer meurbet !

- D Gloar da Vari ha meuleudi,
Pebezh burzud evurus!
Mari Gwerc'hez ha Mamm ivez,
Gwerc'hez ha Mamm da Jezuz!**
- 1 O ma ene kanomp bemdez
Da Vari meuleudioù;
Hec'h oberoù, hec'h holl vuhez,
A zo -leun a vurzudoù.
- 2 Teod an den zo gwall dister
Evit komz eus a Vari;
Mes he c'halon a zo tener,
Holl e c'hellomp he meuliñ.
- 3 Eus a Yari an holl bobloù
A denn gloar ha sklerijenn
He santelezh, he vertuzioù,
A zo skouer ar Gristenien.
- 4 Klevet he mouezh dimp o laret
« Sentet, sentet ouzh Jezuz :
« 'N hoc'h holl vuhez, mar hen karet
« Jezuz ho rento eürus ! »
- 5 Kalonoù sec'h ha glac'haret,
Deut da gavet ar Werc'hez :
Gant Mari e ver konfortet
Er vrasañ tristidigezh.
- 6 O Mari, klevet ma fedenn,
Pareet ma goulioù;
En ho krasoù reit din lodenn
Ha perzh en ho vertuzioù.

Fi ho salud, Rouanez an Aelez

**D Ni ho salud, Rouanez an Aelez,
C'hwi 'zo hon Mamm, ar Vamm a drugarez,
Hon holl douster, buhez hag esperañs,
Ni ho salud, gant kalz a reverañs.**

- 1 Deoc'h-hu Gwerc'hez, e kasomp hon fedenn,
Ni divroet ha siwazh! pec'herien :
Ouzoc'h, Gwerc'hez, e kriomp er bed-rmañ,
Ni pere zo bugale da Eva.
- 2 Deoc'h-hu bepred e tenn hon c'halonoù,
Deoc'h e kasomp hon gouelvan, hon daeroù,
Hon fiziañs ni 'zo en ho madelezh,
En draonienn-mañ leun a dristidigezh.
- 3 Pa deuy an deiz da guitaat ar bed-rmañ,
Raktal goude hon hirvoud diwezhañ,
Diskouezet dimp, Mamm vat ha truezus,
Er Baradoz, bizaj ho Mab Jezuz.
- 4 O Gwerc'hez sakr, meurbet karantezus,
O Gwerc'hez dous, meurbet trugarezus,
Ni ho supli, klevet ouzh hon fedenn :
Hon diwallet bremañ ha da viken !

Alleluia Sul Fask

Alleluia, Alleluia, Alleluia!

- | | |
|--|--|
| 1 Klevet holl vugale Doue :
Jezuz ho Mestr hag ho Roue,
A varv da vev 'zo deut hirie.
Alleluia! | 4 Met an diskibl muiañ-karet
Primoc'h 'vit Per en deus redet;
P'en deus gwelet, en deus kredet.
Alleluia! |
| 2 Madalen, ganti div all c'hoazh,
Ouzh bez Jezuz pa dostaas
Digor ha goullou e gavas.
Alleluia! | 5 Un Ael gwenn eno azezet
A respont d'ar gwragez nec'het
Emañ Jezuz resusitet !
Alleluia! |
| 3 Erruet gantê an doare,
Daou abostol, diouzh ar beure,
Etrezek ar bez a rede.
Alleluia! | 6 Er gouel-mañ kaer dreist pep hini
Ra vezo dre-holl meuleudi
D'un Doue ken mat ouzhomp-ni
Alleluia! |

Di ho salud, Steredenn vor

- | | |
|--|--|
| D Ni ho salud, Steredenn vor,
Mamm da Zoue, leun a enor;
Gwerc'hez bepred, dor an Neñvoù,
Selaouet ouzh hon pedennoù. | 3 Diskouezet ez oc'h ur Vamm vat
En andred an dud emzivad;
Gret m'hon selaouo an hini
Hoc'h eus ganet evidornp-ni. |
| 1 Resevet ar salud santel
A reas deoc'h an ael Gabriel;
Roet ur peoc'h ferm dimp er bed-mañ
O cheñch an ano a Eva. | 4 Gwerc'hez dispar e pep feson,
Dous dreist an holl, glan a galon,
Gret ma vimp divlam a bec'hed
Dous evel doc'h ha pur bepred. |
| 2 Torret chadenn ar bec'herien,
D'ar re zo dall roet sklerijenn,
Pellaet diouzhimp pep droug dalc'hmat,
Goulennet dimp an holl draoù mat! | 5 Gret ma vo santel hon buhez
Ha sur hon hent trezek Doue,
Ken na vimp, o welet Jezuz,
En hon gwir vro ganeoc'h eürus. |

Mabig Jezuz

- | | |
|--|--|
| D O Mabig Jezuz, deoc'h me 'lar;
A-greiz ma c'halon me ho kar;
Ya, dreist pep tra me ho karo,
Betek ma teuy eur ma maro | 2 O Mabig Jezuz, me ho ped,
Ho pezet truez ouzh ar bed;
Roet sklerijenn d'an dud dall,
Chadennet startoc'h an diaoul fall |
| 1 O Mabig Jezuz, me 'zo paour,
N'em eus ket mir, ezañs nag aour.
Met gant karantez, deoc'h me 'ro
Ma c'horf, ma ene war-un-dro. | 3 O Mabig Jezuz, gret din mont
D'ho kaout en Nefiv, eun deiz-da-zont
Da chom eürus en ho kichen
Ha d'ho meuliñ da virviken. |

Pa oa ganet Jezuz

Gloria in excelsis Deo

- 1 Pa oa ganet Jezuz hon Salver,
Mari e Vamm hen mailhuras;
E Bethleem en ur c'hraou dister,
War ar plouz hi hen astennas.
- 2 Dre ar parkoù e oa pastored
Dihun en noz ha war vale,
Evit suroc'h diwall o deñved
Gourvezet tro-war-dro dezhe.
- 3 Setu un ael, deut a-berzh Doue,
O tiskenn hag o lavaret :
« N'ho pezet ket aon dirazon-me;
« An neventi 'zo kaer meurbet. »
- 4 «E kêr David eo ganet henoazh
« Ar Mesi keit 'zo gortozet;
« Daoust d'e zaeroù ha d'e gorfig noazh,
« It d'an daoulin, hag ad oret. »
- 5 Kenkent en oabl, aelez a-vandenn
A voe klevet o c'hantikoù,
Nijal a raent en ur sklerijenn
A bare dre ar maezioù.

Diskennet eus an Neñvoù

- 1 Diskennet eus an Neñvoù, sperejoù evurus,
Deut adarre da ganañ meuleudi da Jezuz;
Publiet e vadelezh dre gantikoù a c'hloar
Hag anoñset a-nevez ar peoc'h war an douar.
- 2 Diwanet 'zo ur rozenn war wrizienn Izaï,
N'eus ket en hon liorzhoù ur fleurenn evelti;
Evel ur flourdilizenn savet e-kreiz an drez,
Eus ar wezenn a bec'hed eo deut ar santelezh.
- 3 Ar vamm he deus hen ganet a zo anvet Mari,
Ar c'haerañ eus an aelez 'zo nebeut diraki,
Choazet eo bet da bried gant ar Spered Santel,
Evit bezañ Rouanez er palez eternel.
- 4 «Selaouet, a lavare an ael d'ar bastored,
« An tu d'e anavezout setu deoc'h diskleriet
« Ar bugel zo mailhuret en ur c'hraouig dister,
« War un tamm plouz astennet, hennezh eo ho Salver! »
- 5 Tostaet, eneoù fidel, da dommañ ho krouer,
Krenañ 'ra gant anoued ar bugelig tener!
E lojet en ho kalon, klet mat e vo eno,
Gwell evit en ur palez ganeoc'h en em blijo.

Jezuz, dre ho soufransoù

- | | |
|--|--|
| 1 O soñjal en hon fec'hejoù,
Jezuz er jardin stouet,
A c'hwez ar gwad, a skuilh daeroù,
E galon a zo rannet ! | 4 Pilat a ziskouez er stad-se
Jezuz d'ar bobl kounnaret;
« Barnet-añ, hastet, emeze,
« Ne c'houlomp ken hen gwelet !» |
| D O Jezuz, dre ho soufransoù,
Ho pezet ouzimp truez,
Ha skuilhet en hon eneoù
Gwir c'hlaç'har ha karantez | 5 Jezuz e Groaz war e zivskoaz,
A gerzh trezek ar C'halvar;
Dinerzh eo, ha kouezhañ a ra
Betek teir gwech d'an douar. |
| 2 O krediñ distan ar c'holer,
Pilat a c'halv sourdarded,
Ha gante, stag ouzh ar voges,
Jezuz a zo skourjezet. | 6 Ouzh ar Groaz neuze hen stager,
Tachoù hir en e vemproù;
A bep tu dezhañ zo daou laer
Brudet dre o zorfejoù. |
| 3 War e benn, dre fars e lakont,
Barroù spenn da gurunenn,
Ha dirakan e taoulinont,
O c'hoarzhin eus e anken. | 7 Da deir eur ne chom ken eno,
Nemet ur c'horf disec'het
Salver ar bed a zo maro,
Gant e vugale skoet ! |

Kentelioù ar Groaz

- | | |
|---|--|
| 1 Diwar lein an touriou,
Ar Groaz a lar dalc'hmat
« Kristenien, d'an Neñvoù,
Savet ho taoulagad! » | 3 Dirak holl dud an ti,
Ar Groaz ouzh ar voges,
A zesk da bep hini
Ober mat e zever. |
| D Bepred e-lec'h ma vo
Dirakañ Kroaz Jezuz,
Ur c'hristen a gavo
Kentelioù talvoudus. | 4 Deskiñ 'ra d'ar bugel
Bezañ bepred sentus :
Sentiñ betek mervel,
Se tu buhez Jezuz. |
| 2 Ar Groaz war an heñchoù
A lar d'an tremener :
Gwir hent bro an Neñvoù
Eo hent Kroaz hon Salver. | 5 Ar Groaz, war ar bezioù,
He deus un nerzh dispar
D'ober d'ar c'halonoù
Dougen pouez ar glac 'har. |

Doue, gwir breid

- | | |
|---|--|
| 1 Doue, gwir bried
D'an eneoù,
C'hwi 'c'h eus ma c'hrouet,
C'hwi 'c'h eus ma frenet,
C'hwi 'c'h eus ma c'hrouet,
'Vit an Neñvoù, | 3 Pignomp, ma ene,
War ar C'halvar,
Gwelomp un Doue
Leun a garantez,
Gwelomp un Doue
En e c'hlaç'har. |
| D Gwerc'hez venniget,
Mamm druezus,
Me eo 'm eus lazhet,
Hen gouzout a ret,
Me eo 'm eus lazhet
Ho mab Jezuz. | 4 Ha me, ma Doue,
Me ma-unan,
Am eus hep truez,
Dre ma gwall vuhez,
Am eus hep truez,
Kresket ho poan. |
| 2 Aboe pell amzer,
N'hellan ket nac'h,
Ez on, ma Salver,
Siwazh, ur pec'her,
Ez on, ma Salver,
Enebour dec'h. | 5 C'hwi a zo bepred
Ur gwir Salver,
Ha ne c'houllet ket
E ve den daonet,
Ha ne c'houllet ket
Koll ar pec'her. |